

ANVIOÙ HON LEC'HIOÙ (13)

Apostilhenn da c'herdarzh ar ger ploue. Evel ne c'hall empenn ebet chom da ruzañ pe da foraniñ nerzh hag amzer em eus kredet derc'hel gant ma frederennoù diskoulmañ donedigezh ar ger *ploue*, ur wezh ouzhpenn. Dre forzh soñjal, kroaziañ ha tapout eñvor un hent bennak e teu an traoù d'ar spered. Sede m'am eus taolet pled zo ur ger all, boutin mat, o vezañ gwisket ar memes stumm fonologel hag ar ger *ploue* : ar ger *roue*, an hini eo. En brezhoneg zo, pe zo bet, lakaomp, daou c'her evit ar galleg « roi », al latin « rex » : *ri* ha *roue*. Met, evel am eus lâret, eo *roue* eo hon eus c'hoant da soursial outañ amañ. Fonnus a-walc'h eo al lennegezh diwar e benn hag ul lennegezh o tifoupañ ingal war ar memes gerdarzh, etimologiezh, mard eo gwell ganeoc'h. Un etimologiezh o lakaat al latin *rēg-*, *rēgem* diwar al latin *rex* e kont. Hag evit kompren an traoù e rankomp splujañ da gentañ en stummoù kozh ar ger. Sede ma ro ar c'herneveureg kozh : *ruy* o c'hlozañ al latin *rex*, pe an droienn *gurhemîn ruif* o c'hlozañ al latin *edictum*. Ar c'hembraeg, hennezh, a ro dimp ivez *rwyf* en daouzekvet kantved. Patrom istor hon ger *roue* zo heñvel ouzh reoù *ruif* ha *rwyf*. Ar geriennoù-se a deu eus ur wrizienn **rēm-*, evel ar galianeg *rēmos* « kentañ, priñs ». Soñjit en anv ar gêr *Reims* en Bro-C'hall, diwar ar memes gwrizienn. Sede eo kar d'ar ger latin *primus*, met er yezhoù keltiek eo kouezhet ar *p-* evel reizh. Soñjit el latin *pater* hag er gouezeleg kozh *athir* « tad ». Ar ger *rouanez* « reine », eñ, a deu eus **ruiu-an-*. Evit a sell ar ger all, *ri*, kavet e vez en anv-lec'h *Rianteg*, en kichen *Porzh-Loeiz*, diwar **rigantāco*, met ivez en anvioù tud evel *Riou* (gant an *-ou* hipokoristek), etc.

Sede ma weler zo ur fonologiezh kenstur etre *ploue* ha *roue* : *plui* pe *plue* ha *ru* pe *rue*. N'eus ket da glask gwariañ lezennoù ar fonologiezh istorel ha klask pemp troad d'ar maout, a gav din. Ma teu *roue* diwar **rēm-* e teu *ploue* diwar **plēb-* ha marteze **plēm-*... Ar pezh na zislâr tamm ar **plōiþ* kinniget gant Kenneth H. Jackson hag Erwan Vallerie. Ha gant se ec'h adlâran n'eo ket dibosupl e vije bet ur ger predenek tost-tre da veizad ar ger latin *plebs*.

Ha bezomp soñj penaos e veze kavet ha *roue* ha *ploue* en un tonkad, evel en gwerzennoù *Dismant Jeruzalem*, eus tro 1480, unan eus hon skridoù koshañ : *Map Doe Roe ploeou*, « Fils de Dieu Roi des nations ». Ha ma 'm eus meneget ar werzenn-se eo abalamour ma kaver enni ar ger *doe* « doue ». Stumm en deus da vezañ diouzh patrom fonologel *ploue* ha *roue* : *duy* hengerneveureg en *duy chefuïdoc* o c'hlozañ *Deus omnipotens*, an anv den kembraeg eus an daouzekvet kantved *gwasduiu* (soñjit en anv brezhonek *Gwazdoue*), pe c'hoazh an anv henvrezhoneg *Duiuuuoret* « secours de Dieu », en Kartular Redon. Anat e teu *doue* eus un henvrezhoneg *duiu* (diwar **dēv-*) kenstur e fonologiezh gant hini *ploue* ha gant hini *roue*. Digor e chom hent hon prederennoù eta...

Ma, distroomp d'hon *lann* met hep kuitaat *plou* ! En un nebeud anvioù parrouzioù, kumunioù, eo koublet an daou dermen, an daou hag a oar bezañ arouez aozadur hon bro. Bezañ zo, da vihanañ, pevar anezhe o kinnig *ploue* + *lann* (ha hini ebet o kinnig *lann* + *ploue*) : *Gwiglann* hon eus gwelet c'hoazh ha soñj hon eus eo ur *bloue* gozh. Bezañ e oa *Ploelan* en 1277. En tu aod ar su, en tu Bro ar C'hab, tost da Zouarnenez, zo ur barrouz anvet *Poullann* hag a oa *Pluilan* en 1162. Lammomp war-du *Koad Pempont* nepell diouzh Roazhon lec'h m'emañ *Plelann-Veur* hag a oa *Pluilan* en 834. Ha ma zo eus *Plelann-Veur* zo ivez eus *Plelann-Vihan*, entre *Lambal* ha *Dinam*, hag a oa *Ploelan* en 1121. Unan all a vefe, *Pellann*, *Plelauff* en ofisiel, met gwelloc'h heuliañ arguzennoù Erwan Vallerie hag a wel ennañ un anv *Elañv* kentoc'h ha n'eo ket *lann*. Ha gwir eo eo direol a-walc'h ar stummoù kozh anezhañ. Ma, menegiñ ar c'houblad merker-se zo lakaat war-wel lec'hioù bet a-bouez en istor koshañ hon bro, a-raok donedigezh ar Vretoned zoken. Ne roin ket roll an traezoù arkeologel a gaver er ploueoù-se, met ar re-seoù zo da verkañ : traezoù kozh o sevel da vare oad ar vein evit ar peurvrasañ. Merkañ a rin just emañ ar *Roc'h-Toull* evit ul lodenn anezhi en *Gwiglann*, met se zo evit an dud a oar eus hon lennegezh Gwalarn ! Sede, sede... Hag ur meneg ispisial evit *Plelann-Veur* ma zo bet eno un abati sanket don en hon istor, un abati evel ur merker-heklev da abati *Redon*, evit gwir. Un abati hag a roas bod da unan eus hon skrivagnerien goshañ anavezet e anv, *Ingomar*, a oa ivez manac'h en Sant-Meven (alias *Saint-Méen-le-Grand*). *Ingomar* hag a skrivas, entre traoù all, buhez *Iudichael* (alias *Jikel*, *Jezekel*, etc). Unan eus hon roueed koshañ. Ur werz kozh, anvet *gourc'han*, un doare meulgan, zo diwar e benn.

Neuze, penaos kompren ar c'houblad-se, *ploue* ha *lann*, o reiñ bod da draezoù bet testoù eus mareoù koshañ hon bro ?

Kement-se a ziskouez penaos eo gwriennet hon istor pell-mat er pezh zo anvet (en un doare tremen droch) ar ragistor. Ar Vretoned pan oant deuet o devoa kemeret o merkoù en lec'hioù anavezet a-rummad da rummad. *Aremorica*, bet *Ledav* goude, hag erfin *Breizh*, diwar an aozadur peurdoket gant ploueoù ha lannoù niverus ha frammet, a oa un tiriad anavezet mat ha n'eo ket gant ar Vretoned (da vezañ !) nemetken, met ivez gant Iwerzhoniz. A-viskoazh o devoa Iwerzhoniz, hon amezeien ha n'eo ket hon enebourien, evel ma oant d'ur c'houlz war *Enez Preden*, sellet ouzh *Aremorica* evel ur vro gant ur roll doubl, ha se hervez mareoù an istor ha pouez ar vojenn. Mojennel hag istorel. Pan oa *Ledav* (*Letha* en heniwerzhoneg) e oa *Dor ar Bed All*, ur vro vojennel, ha se hervez Ch. J.

Guyonvarc'h. Ur vro da gavout repu ha peoc'h da viken. Moarvat ar savadurioù mein niverus o deus graet eus Breizh da zont ur c'hreiz tellurek. Mein hon memor met ivez mein memor pobleù an Atlantel.

Istorel ivez. Ur vro evel un astenn en tu all d'ar mor. Ha goude e voe Breizh an nor, un nor all, da dizhout Europa. Bezit soñj, kement dornskrid iwerzhonek kozh, war-bouez nebeut, zo bet o veajiñ dre Vreizh a-raok peñseañ en penn pellañ Europa hag ober plijadur d'ar mirdioù-levraouegoù zo eno herie. Mor Breizh, Mor Iwerzhon. Daou vor o liammañ pobleù, memor ha yezhoù.
[da vezañ kendalc'het]

Herve Bihan

Levrlennadur

[a vo roet en dibenn al lodenn diwezhañ]